



CHANSON

Ar Souben Les-Guin-Ardant



En eur gommanç canan, excus a c'houlennan
Digant kement hini a so present aman.
A beurs eun oac'h yaouank, din a oa ordrenet
Rei dean souben les, nos kenta he euret.

Mes en lec'h souben les, me rei d'ac'h da danvad
Malaga ha Champagn, liqueurio dilicad
Biscoas ne oa evet sort gante bars ar vro,
Me meus gret ho digaç express deus a Vordeaux.

Na neus princ, na baron, roue, nag amperour
A guement ma nefe tanvet ma liquis,
Pa zon deuet expiess evit ho regati
An tanva kenta a so d'ho pried a c'houi.

An eil tanva a zo d'an daou zen a henor
A neus ho conduit eus tol hoh-Redemptor,
An drede tanva nei so do mam ha do tad,
Pere a neus glac'har ho tonned do couitad ;
D'ar bevaret a bedan breudeur a c'hoarezet,
Kement hini ho car, querent ha mignonnet.

AR PES SO AMAN VOAR LERC'H A VE PROPR DA GANAN EUS TOL DA EUN EURED

An devez a hirio, pebec contantamant,
Guelet an diou famill, ha kement so present
Aman nem assamblet gant cals a garante,
Diredet oll gant joa d'henori an dud neve.

Na gredant quet a ve den er gompagnunez
A guement a nefe nep sort tristidiguez,
Gouscoude meus clewet alies lavaret ;
Er bed man na neus quet a vouir evurustet.

Unan a c'houlen crampoës
Hac eun all galletez.

Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mes.
Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi,
Na neus den evit clevet reson vad e'ot ganti.
Fachet e deus e fried
Adieu d'an amourouset.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Lacait eves, diouallet,
C'houi he an evurusan tud a so voar ar bed.

C'houi so dre ar pardonniou
Ha dre an assambleou,
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taquennou.
Eun den yaouank, mar gue fur,
So parfet he blijadur.

A vanque eun dra benag dalc'hined de evurusted.

Darn so hac a laer ar yalc'h
Ha darn all e ya war varc'h.
Re all a gar ar chopin, quen azvont me wawalc'h.
Tud yaouanc, mar dimeet
Choaset tud fur ha parfet.

PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het d'an daou zen neve, chang ha prosperite.

Men ho ped, caradet,
Vit eur farç, ne fachet ket :
Permettet e badinal en tre ar vignonnet.

Graç dimp da nem gavet c'hoas
Joaus evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bloa, chars ar memes plaç,
Ho trinka gant ho goeren
Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE



CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouit, ma mignonnet,
Chanson an amourousted
A zo gant eur c'hernevad vit an deiz composit

Amourousted zo eur guer
Hac a zo douç ha tener
Caus he da vil nec'hamant hag ive da vil mizer

Pa vo an noz pe an de
Daou zen yaouank a goste
Quent ma c'houfeong doare he c'harivo gante.

Ar pot a goze brao
Hac ar plac'h a c'houfe
C'houfe ma lot nemet eun dra.
Amourousted a ra dhe
Dimezi heb dale.

Pa vouing neve eureuget,
Vad a ra d'he n'em velet,
Casi na ra met unan an ozac'h hag ar vreg.

Quen bras e ar garante
Ha quen bras an amitie
Neus an eil vit eguile hag en noz hag en de,
He ra deze lavaret
Pell zo cleyemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,
Memes tra divoallet,
Liesoc'h zo dimezet vit a zo ezet.

Guelet a meump a vejou
Cals a chanchamanhou,
Er menajou e caver bep sort ambarrassou,
Pa zeu en tieguezou
Cals deus a bouponou.

Bezan e glac harus vit eur vam hag ou tad
Pa welont ho bugale ho tonned d'ho couitad ;
Maguet ho deus int bet gant teneridiguez,
Ha rei d'he ho c'honje dent er priedelez.

Breman daou zen yaouanc, c'houi a vo obliget
Da zont d'ho c'honsoli queit na vouint var ar bed.
C'houi a heus bet ive glac'har ha calounad
O tont da guimiadi eus ho mam nag ho tad.

Ho kalon so bet treuzet gant ar glac'har
Ho loaret kenavo ha do preur ha do c'hoar,
Bemde oac'h assambles neun union barfet,
Hag en nos hag en de, c'houi so en em garet.

Gant ho bolonte vad e zoe h nem separet,
Ha cetu c'houi breman unisset d'eur pried,
Kenavo tad ha mam, breudeur ha c'hoarezet,
Me ha ya da zelec'hel menaj gant ma fried.

Ar briedeles he kaera tra so er bed,
Gant Doue he nann e bet e ablizet
Pa oa krouet Adam gant Krouer ar bed-man,
E neus roet Eva evit pried dezan.

Rag se, daou zen yaouank, kemeret confianç,
Ha Doue a rei d'ac'h prosperite ha chang,
Ha nem garet bepret gant guir fidelite,
Savet ho pugale en carante Doue,
Ha pa zeui ar maro do separi ho taou,
Graç d'ac'h da nem gavet assambles en envou.

LENEINDRE.

(Propriété de l'écrivain)

Moulet e Montroulez, e ty J. Letreguilly, Ru Baris, 12.